


JEZUZ HA BREIZ!

PEDEN ANN DEVEJERRIEN

DA

SANT JOZEF



Allegretto.

Sant Jo zef binni- get, c'houi ar zand a ga-
 rann, Chi- leo-et ann dud keaz hen euz poan o vevan,
rit. al fine. *molto.*
 Chi- leo-et ann dud keas hen euz poan o ve- van.

DISKAN.

Sant Jozef binniget, c'houi ar zand a garann,
 Chileoet ann dud keaz hen euz poan o vevan. (2 wech.)

Sant Jozef binniget, c'houi n'euz bet poan ive,
 Zikouret ann dud keaz da c'honed ho bue. (2 w.)

Da gad eunn tamm bara d'ar Verc'hez ha d'he Map,
 C'houi zo bet evel-d'omp gant ho tevez zur mad.

Enn Breiz-Izel hirie ar pinvik zo nec'h et :
 Mar n'hen e ar pinvik, ar paour n'hen evo ket.

Reit eta d'ar pinvik, reit ho pennoz, Sant keaz,
 Hag ar paour da vevan'n o bepred he devez,

Sant Josef binniget, c'houi ar zand a garann,
Chileoet ann dud keaz hen euz poan o vevan.

Kalz so hag a zo et, gant eomm marteze,
Kalz so et da Vro-C'hal da c'honet ho bue.

Ni n'oullomp ket, Sant Keaz, Kouitaet Breiz-Izel,
Elec'h m'omb badeet, hon deuz c'hoant da vervel.

N'omp ket o klask daspun mado braz ar bed-man,
Er baradoz hepken e fell d'imb diskouizan.

Gand ma vezo enn ti eunn tamm bara bemde,
Ni vezo evuruz ha ni veulo Doue.

Sant Jozef binniget, c'houi ar zand a garann,
Chileoet ann dud keaz hen euz poan o vevan.

Eunn dra zo dreist pep tra, ann dra-se a c'houllan,
Gras Doue d'ar galon eo pezh so ar gwellan.

Furan bugel zo bet oa Jezuz, ho map keaz :
Reit d'hon bugalego eunn tamm euz he furnez.

Ne zenter ken, ziuouaz ! reit d'he gras da zenti,
Hag e vezo urs vad adarre enn pep ti.

Hag eunn de evel d'hoc'h ni a varvo joauz,
Enn daou du d'hon gwelê ar Verc'hez ha Jezuz.

Imprimatur :

Saint-Brieuc, le 23 mars 1883.

A. CHATTON, *vic. gén.*